

TROIAD

SINEMA E BREZHONEG EVIT AR SKOLIOÙ
KENURZHIET GANT DAULAGAD BREIZH

Ar Briñsez

hag an Eostlig



DOSER AR SKOLAERIEN
Kinniget gant Daoulagad Breizh

En doser amañ e kavoc'h ar respontoù da fichennoù ar skolidi ha kinnigoù abadennoù da gas er c'hlas war-lerc'h bezañ bet gwelet ar film. Evel-just, an holl draoù a vo kavet en doser-mañ n'int nemet kinnigoù, deoc'h da azasaat an abadennoù d'ho c'hoantoù, d'ho ezhommoù, ha da ezhommoù ha c'hoantoù ar skolidi ! Da azasaat eo an obererezhioù kinniget en doser-mañ hervez oad ha live ar skolidi ivez.

Taolenn


A-raok ar film	p. 3
FICHENN 1 An istorioù.....	p. 4
FICHENN 2 Anavezout al laboused.....	p. 5
FICHENN 3 A bep seurt liv !.....	p. 6
FICHENN 4 Nijal evel ul labous.....	p. 7
FICHENN 5 Kaout fiziañs ennon.....	p. 8
FICHENN 6 Bezañ dizalc'h ha kurius.....	p. 9
FICHENN 7 Tres da labous.....	p. 13
FICHENN 8 Kludet er gwez.....	p. 15

A-raok ar film Studiañ ar skritell asambles

Sellet ouzh ar skritell asambles a-raok an abadenn a sikouro ar vugale da dennañ o mat eus ar filmoù pa voc'h er sinema. Setu ul listennad goulennoù (ha respontoù posubl) evit sikour !




- ☞ **Peseurt tudennoù a vez gwelet ouzh ar skritell ?**
Ur plac'hig gant laboused tro-dro dezhi a vez gwelet.
Petra emaint oc'h ober ? Sellout a ra al laboused ouzh ar plac'hig. Ar plac'hig a sell ouzh ul labous a zo a-us dezhi, war ur brank. Kludet ez eus ul labous glas war he dorn.
- ☞ **Deskrivit ar plac'hig : Penaos ez eo gwisket ?**
Gant ur sae kimono mouk ha gwenn eo gwisket. Un daledenn alaouret he deus ganti war he fenn ha spilhoù alaouret en he blev. Du eo he blev. Tres ur briñsez he deus.
Penaos eo ar bed ganti ? Mousc'hoarzhin a ra ha sevel he divrec'h. Tres eürus a zo warni.
- ☞ **Deskrivit al laboused : Pe liv int ? Gouzout a rit pe anv eo lod anezho ? Pe spesad int ?**
Un eostig glas a vez gwelet e dorn ar briñsez. Ur golvan (a vez anvet filip ivez) orañjez ha louet a zo kludet war ar brank uhelañ. Ul laouenan melen a zo a-dreñv d'ar briñsez, ur flammeg boutin (roz e liv), un erer mouk, ur peroked roz ha mouz, gwazi louet, un toukan glas, laboused glas-kaol, ur c'hog-Indez roz ha mouk.
- ☞ **Daou labous a zo o sellet an eil ouzh egile. Kredet 'vefe emaint o tiziañ an eil egile. Peseurt re eo ?**
Al laouenan melen, war ar brank, eus tu kleiz ar skritell, hag an erer mouk en traoñ a-zehoù. N'eo ket kontant al laouenan. Krizañ a ra e dal hag emañ e zivaskell war e zivlez, evel ma rafe un den fachet a lak e zaouarn war e zivlez. Selloù du a ra an erer dezhañ.
- ☞ **Pelec'h emaint ? Pignet eo ar briñsez war ur garreg roz. War ur menez emañ marteze ? Petra a vefe klevet, a soñj deoc'h ?** Kan al laboused, da skouer.
- ☞ **Petra 'zo skrivet gant lizherennoù bras ? "Ar briñsez hag an eostig". Petra eo se ? Titl an 3de film eo. Pelec'h emañ ar briñsez ha pelec'h emañ an eostig ?**
E-kreiz ar skeudenn emañ ar briñsez. Al labous glas en he dorn eo an eostig. Sellet a ra ouzh ur golvan/filip (labous an eil film). Er film 1añ, An erer hag al laouenan, e vez gwelet al laboused all.
- ☞ **Gant an titouroù 'p eus kavet, daoust hag e c'hellit kaout ur soñj eus ar pezh a c'hoarvez en 3 film ?**



FICHENN 1 An istorioù

Respontoù


Komz a ra an erer ouzh an holl laboused bodet tro-dro dezhañ. Al laouenan a zifi an erer : klask a raint mont an uhelañ posupl en oabl. Trec'h eo al laouenan. Dont a ra da vezañ roue.



Ar manac'hig en em gav gant ur golvan. Mont a ra d'e heul er menez. Ur wech m'eo deuet kozh ez a en-dro ar manac'h d'e vanati.



Kerez a sell ouzh al laboused gant he mignonez nevez, Bleuenn. Kerez a fell dezhi mont maez met ne fell ket d'he zad. Tec'hout a ra Kerez kuit eus ar gêr.



Obererezhioù ouzhpenn

Gant fotoioù ar FICHENN 1, ur wech graet ar c'hoari e c'hellit lakaat ar vugale da gomz en-dro deus istor an 3 film (an tudennoù, al lec'hioù, urzh an darvoudoù en istor). Gall a rit ivez lakaat anezho da geñveriañ an 3 film. Peseurt diforc'hioù o deus gwelet etre an 3 film (a-fed livioù, padelezh, sonerezh...)? Petra a zo boutin etre an 3 film ?

Traoù disheñvel

Er film 1añ, An erer hag al laouenan, n'eus nemet laboused. N'ez eus den ebet.
En eil film, Golvaned, ne vez lavaret ger ebet. N'eus nemet sonerezh.
En 3de film, Ar briñsez hag an eostig, ez eo ur plac'hig an dudenn bennañ.



Traoù boutin

Laboused a zo e pep hini eus an 3 film. Desket e vez un dra bennak diwar-benn ar vuhez e pep hini eus an 3 film.
 Gwelloc'h bezañ speredek ha fin eget kreñv gant ar c'hoant gwaskañ ar re all (1).
 Ret eo profitañ eus ar vuhez ha bezañ kurius. (2).
 Ret eo krediñ mont maez da anavezout ar bed evit kreskiñ ha bleuñviñ. (3).

Tudennoù pennañ an 3 film - al laouenan, ar manac'hig ha Kerez - a ziskouez bezañ kurius, ijinus, ha dont a reont a-benn da ziaesterioù bras.
 Gant ar memes teknik eo bet sevenet an 3 film : an dresadenn-vev 2D. N'int ket filmoù 3D, n'int ket bet graet gant stop-motion na gant paper didroc'het.

FICHENN 2 Anavezout al laboused

Penaos eo al laboused ?

Korf al laboused

Gant ar skolidi yaouankañ e c'hellit goulenn deskrivañ al labous. Ar gerioù a vank dezho a vo roet ganeoc'h : pluñv, beg, pavioù, divaskell.



Evit mont donoc'h en displegadurioù :

Ped pav o deus al laboused ?

Daou bav o deus al laboused evit kerzhout. Daoudroadek int.



Pegen bras eo al laboused ?

Laboused a bep seurt ment a zo, eus 5 santimetr da 3 metr.



Daoust ha nijal a ouzont ober ?

Divaskell o deus evit nijal, met laboused spesadoù 'zo n'hellont ket ober, evel ar manked.



Daoust ha neuñvial a ouzont ober ?

Laboused 'zo a oar neuñvial. Lod anezho a chom war-c'horre an dour, evel an houldi. Lod all a oar splujañ mat-tre, evel ar manked.




Da betra 'servij o fluñv ?


Goloet eo o divaskell gant pluñv evit ma c'hellfent nijal aes. Servijout a reont da wareziñ anezho rak an tommder hag ar yenijenn ivez.



Daoust ha dent o deus ?

Ur beg o deus, met n'o deus dant ebet.





FICHENN 3 A bep seurt liv !

Goulennit d'ar vugale peseurt livioù a vez anavezet ganto en ur sellet ouzh al laboused. Dezhho da ziskouez al laboused melen, ruz hag all. Goulennit d'ar vugale adlavarout an anvioù meur a wech.

E-touez an 20 labous-se, setu an 3 labous a vez gwelet 2 wech : An 8 hag an 10, an 12 hag ar 15, ar 4 hag an 20.



Danvez ouzhpenn evit anavezout laboused Breizh hag ar bed :


Lipousat laboused gant Jean-Baptiste Gandon ha Florence Dollé, bet troet gant Skol an Emsav.

Laboused ar vro, Laboused ar c'hoadoù, Laboused al liorzhoù, Laboused ar menezioù gant Tudual Huon ha Padrig an Habask.

Obererezhioù ouzhpenn :

Ober ar c'hoari memory « Laboused Memor – Keit Vimp Bev ».

Selaou kan ul labous o sellet ouzh ur poltred anezhañ. Kuzh ar fotoioù goude ha klask anavezout pep labous. <https://www.chant-oiseaux.fr/>



FICHENN 4 Nijal evel ul labous

Da bep lec'h !

Gra ur c'helc'h tro-dro d'ar respont mat.

1) An erer hag al laouenan a ra ur redadeg evit klask gouzout piv az aio **an uhelañ**

Betek an egor ez eont zoken !


2) Pelec'h emañ al laouenan e-keñver an erer ouzh ar skeudenn-se ?

A-us d'an erer emañ al laouenan.

Skriv ar respont mat e pep toull

a-us

a-gleiz



a-zehoù

dindan

Ped labous a zo ?

Liv ar sifr mat


10

10 labous a zo war savenn ti Kerez.



Gallout a rit goulenn gant ar vugale e vefe diskouezet deoc'h pelec'h emañ al laboused. Gant gerioù al lec'hiañ e vo graet ganto : war ur blantenn, war doenn ar skudell, o nijal a-zehoù d'ar skudell, war an asied a zo dindan ar skudell, war ur brank e-krec'h ar wezenn, war un ti bihan a-istribilh ouzh ar vrous-gwezenn, war vord ur pot e traoñ ar wezenn.

Un doare all : lak ur pezh war bep labous ha kont memes koulz.



FICHENN 5 Kaout fiziañs ennon

Krediñ sellout pelloc'h

Petra a c'hoarvez e fin ar film *Ar briñsez hag an eostig* ?

 **Respont :** Dineizhañ a ra Kerez

Dineizhañ a dalvez « mont kuit eus an neizh ». Da lavaret eo kreskiñ hag ober traoù hec'h-unan.

Displegadennoù : Emañ Kerez o paouez lidañ he 7 vloaz. Bras a-walc'h eo evit mont da c'hoari maez. Anavezout ar bed maez eus an ti a fell dezhi, met nec'het eo he zad e vefe dañjerus eviti. Gant sikour he mamm hag hini Bleuenn, he mignonez nevez, e teu da gaout fiziañs enni, tamm-ha-tamm. C'hoari a ra war doenn he zi, deskiñ a ra penaos tresañ laboused... Hag un deiz e tec'h kuit eus an ti evit adkavout an eostig, ul labous dizalc'h ! Kas he buhez dezhi a vez laosket d'ober gant he zud bremañ. Gallout a ra c'hoari maez gant he mignonez.

Ar skeudenn-se tennet eus jenerik fin ar film a c'hellit diskouez d'ar skolidi

E galleg e vez lavaret : « voler de ses propres ailes ».



Lavarennoù brezhonek

Gouzout a rez e vez lavaret « kalonek evel ur c'hilhog » e brezhoneg ?

 **Respont :** Fin evel ul louarn eo al laouenan.


Troioù-lavar all diwar-benn al loened a anavezet ?

Evit mont pelloc'h : Troioù-lavar : https://www.brehoweb.bzh/Troioù-lavar_338.html

FICHENN 6 Bezañ dizalc'h ha kurius

Deskriv ar pezh a welez er skeudenn-se.
Petra a fellfe da Gerez ober ?

Bac'het eo er gêr. Klevout a ra bugale o c'hoari gant ur vell a-dreñv d'ar voger ha fell a rafe dezhi mont da gaout anezho.



Petra emañ ar manac'hig oc'h ober ?
Asambles gant piv emañ-eñ ?


Emañ o kouronkañ asambles gant e vignon,
ar golvan bihan.


Plijout a ra dit bezañ er-maez ?
Perak ?

Kurius eo Kerez hag ar manac'hig.
Dedennet int gant al laboused ha fellout a ra dezho anavezout ar bed bras.
Ha te, gant petra out kurius ? Petra a blij dit ober ?




Komz a ra an eostig gant Bleuenn ha sikour a ra da Gerez :

 **Respontoù :** Da vont maez eus he zi, da vezañ dizalc'h ha da anavezout ar bed !




Goulennoù evit kompren :

Bleuenn, merc'h al liorzhour, he deus ar gwir d'ober traoù a zo difennet ouzh Kerez. Petra eo ?

 **Ur respont a c'heller reiñ** : Aotreet eo Bleuenn da vont betek ti Kerez evit kas frouezh dezho. Gallout a ra dibab da belec'h ez a. Kerez a fellfe dezhi ober ar memes tra.


Tad Kerez ne fell ket dezhañ en em gavfe e verc'h gant Bleuenn. Perak ?

 **Ur respont a c'heller reiñ** : Gwareziñ anezhi a fell dezhañ ober rak aon en deus e c'hoarvezfe ur gwall-zarvoud dezhi. Breur bras Kerez a zo marv d'hec'h oad dezhi.


Bleuenn a fell dezhi kavout an eostig met ne fell ket d'he zad ez afe maez. Gwelloc'h eo dezhañ e vefe treset un eostig ganti, kentoc'h. Daoust hag heñvel eo, 'gav dit ?

 **Ur respont a c'heller reiñ** : Ne gan ket an tresadennoù. N'int ket bev.

Profañ a ra dezhi un ardivink a gan evel al laboused. Daoust ha plijet eo Kerez gant ar prof-se ?


 **Ur respont a c'heller reiñ** : N'eo ket, rak n'eo ket bev ar mekanik. E gan ne dalvez netra.

Perak e tres ar briñsez barrennoù ur gaoued ouzh he zresadennoù laboused ?


 **Ur respont a c'heller reiñ** : kavout a ra dezhi ez eo toullbac'het, hi ivez, evel ul labous en e gaoued.




Tad Kerez a lak ur gaoued war an eostig. Fuloriñ a ra Bleuenn ha dizalc'hañ a ra anezhañ o vountañ war ar gaoued alaouret. Goude-se e lavar Bleuenn « ne gano an eostig nemet ma vo... » dieub, maget mat pe selaouet, d'ho soñj ?

 **Ur respont a c'heller reiñ :** ma vo dieub. «Sakrilaj eo laerezh e frankiz digant ur boud», eme Vleuenn.

Mamm Kerez a c'houlenn gant he zad reiñ un dresadenn dezhi. Soñj 'p eus petra 'vez gwelet outi ?

 **Ur respont a c'heller reiñ :** An eostig war ar gerezenn. Mamm Kerez a lavar d'he merc'h he deus da glask ar frankiz. He mamm ha Bleuenn a atiz Kerez da vezañ dieub. An eostig a lavar da Gerez emañ he zi er-maez eus ar mogerioù.

Ne fell ket da Gerez bezañ lesanvet « priñsez » ken. Fell a ra dezhi e vefe graet gant an anv Kerez. Perak, a soñj dit ?

 **Ur respont a c'heller reiñ :** Peogwir ez eo Kerez hec'h anv-bihan dezhi ha ne fell ket dezhi bezañ bac'het en un tour evel ur briñsez, rak talvezout a rafe dezhi koll he frankiz.





Er film *Golvaned* : Petra a ra ar manac'hig pa 'z a maez eus ar manati ?

☞ **Ur respont a c'heller reiñ** : Mont a ra da heul ar golvan. C'hoant en deus da c'houzout da belec'h emañ o vont. Treuziñ a ra ar menez. Lammat a ra war brankoù ar gwez. Paouez a ra evit evañ dour er stêr. Mont a ra da gouronkañ.

Ha plijout a ra dit-te mont da avanturiñ, ivez ?

Ur gaozeadenn a c'hellit aozañ e-pad ur gentel Deskadurezh Keodedel diwar-benn ar goulennoù-se, evit ar c'helc'hiad 2.

Azasait ar goulennoù evit komz eus ar c'henvevañ evit ar c'helc'hiad 1.



Mennozhioù :

Daoust hag e rank ar re greñvañ pe ar re goshañ divizout evit ar re all atav ?

Daoust ha pouezus eo selaou soñjoù ar re all ?

Daoust hag e c'hell ar merc'hed c'hoari maez kement hag ar baotred, krapat ar gwez ?


Daoust hag e c'hell ar baotred kaout plijadur o tresañ hag o livañ ?


Pegoulz en em santez dizalc'h ?

Petra 't eus ar gwir d'ober er skol ?

Petra 't eus ar gwir d'ober er gêr ?

Gant petra 'veze eürus ?







FICHENN 7 Tres da labous pazenn-ha-pazenn

Dafar :

- ur follenn baper
- ur c'hreion-koad hag ur c'homenn
- kreionoù, feltrennoù, livaj pe tammoù kleiz
- bizied evit an doare gant roudoù-bizied.



Ul labous en e sav war al leur (live 1)



1 - Tres stumm ur vi evit ober korf al labous.

Tres un tric'horn orañjez goude evit ober e veg.

Tres e 2 bav oc'h ober div linenn hir liv kistin. Ouzhpenn div linenn vihanoc'h a bep tu evit ober e vizied.

2 - Tres ur pik du ouzhpenn evit ober e lagad.


3 - Goude, tres ur c'helc'h du tro-dro d'ar pik.

4 -Da echuiñ, tres 3 font evit ober e askell.

N'ac'h eus ket ken nemet livañ da labous d'ober !

Un doare all : e plas tresañ korf al labous, gra ur roud-biz gant livaj.

Ul labous o nijal (live 2)



1 - Tres stumm ur vi. Korf al labous eo se.

2 - Ouzhpenn un askell o tresañ 3 font liammet ouzh korf da labous. An askell all a zo kuzhet a-dreñv d'e gorf...

3 - Ur sapre flaper eo al labousig-se ! Nijal ha kanañ a ra memes koulz ! Tres div linenn vihan orañjez o tigeriñ (evel daou du eus un tric'horn n'eo ket echu).

4 - Tres 2 linenn ouzhpenn e traoñ korf da labous beajer evit ober ar pavioù anezhañ.


5 - Tres 3 biz dezhañ goude, oc'h ober linennoù a bep tu.

6 - Ar paour-kaezh labous a zo o vont da dosañ e pep lec'h ! Tres ul lagad dezhañ evit ma c'hellfe gwelout ar gwez tro-dro dezhañ : gra ur pik du dezhañ e-kichen e veg.

7 - N'ac'h eus ket ken nemet diverkañ linenn ar c'horf (a zo kuzhet dindan askell al labous) ha livañ da labous fentus !

Un doare all : e plas tresañ korf al labous, gra ur roud-biz gant livaj.

Mammenn : Objectif dessin.



FICHENN 8a Kludet er gwez

Skeudennoù o tont eus ar film *Ar briñsez hag an eostig*.



Livit ar wezenn gant kreionoù-liv.



Didroc'hit al laboused.



Pegit ul labous war bep brank.

Kuzhet ez eus ul laouenan en o zouez. Pehini eo, d'az soñj ?
E gribenn velen gabellek a vez gwelet.

Ha pelec'h emañ an eostig ?
Gwelet e vez o kanañ !

Gallout a rit envel ar spesadoù loened d'ar vugale ivez.



Ar voualc'h



Ar beufig ruz



Ar boc'hruzic



An eostig-bailh




Al laouenan



An eostig

Skeudennoù ouzhpenn (Fichenn 8)

Soñj o do ar skolidi eus senennoù 'zo pa welint ar skeudennoù ouzhpenn.



Diwar an doser savet e galleg gant Cinéma Public Films

Gouzout hiroc'h war ar filmoù war : https://cinemapublicfilms.fr/films/la_princesse_et_le_rossignol

Warni ez eus kinniget ur bern obererezhioù all e liamm gant ar filmoù.

Teuliad azasaet gant Eloïse Le Guen.

Troet e brezhoneg gant Lena Catalan Marcos

Kempennet gant Matthieu Le Boulch



13 straed Michel Le Nobletz 29100 DOUARNENEZ
contact@daoulagad-breizh.org - www.daoulagad-breizh.org